

8N2-5-004

Treffigat

XIII

Da dy ar zent hag an Elez
Vit gwelet an traou a velez
Traou burzudus; traou heb or far
A ro Doue d'ha nep e gar

XIV

Ex barados d'ha oll-viken
En eur bedi en d'ha gichen
Ni a zavo huel hor moueziou
Da veuli Doue an Aotrou.



IMPRIMATUR :


Kemper, 18 a viz even 1935

Auguste COGNEAU
Eskop Thabracia.

KANTIK

Léchiagat

DA ZANT JAKEZ



I
Sant Jakez, abostol Jésus
Sant ken karet, ken galloudus
Var tud a vor Léchiagat
Tro da galon ha da lagad

DISKAN

Meulomp a greiz kalon
San Jakez hor patron

II

Gand Yann ha da dad Zebede
Epad an noz, a hed an de
Var zao er vag, hep aon ebéd
Varlerc'h pesked e peuz redet

III

Pet gwech, gant dent an aveliou
 Eo bet dis merret da weliou
 Na stank ken huel ha da benn
 Eo bet savet an tarziou gwenn

IV

Pet gwech en deuz an amzer fall
 Da boulzet varzu ar bet all
 Ha klasket ar mor didruez
 Lounka da vag ha da vuez

V

Mez eun deiz ar Mest ho tremen
 Dont var e lerc'h did a gemenn
 Ha sentuz d'har galv ha glevez
 Te zibab eur vicher nevez

VI

Var mor yioulou fall ha yud
 Hep paouez e pesketez tud
 Hag ar Spagn da glevo eun deiz
 O prezeg kelou mad ar Feiz

VII

Gan-ez er Spagn achi da dro
 D'an douar zantel te a zistro
 Dre grister ar roue Herodez
 Evit Doue roes da vuez

VIII

Kleo peden da vortoloded
 En da japell brema bodet
 Ro deomp hirio gant largentez
 Feiz e Doue ha karantez

IX

E kreiz ar moriou dirollet
 Mir na vo hor bagou kollet
 Gant da zorn kreny peg yac'h er stor
 Ro deomp ato henchou assur

X

E mesk tud goapuz ha divez
 En hor c'halon kendalc'h iveauz
 Henvel euz eun tour tan en noz
 Var alum Feiz hon tadou koz

XI

Hor sikour, gant hor bugale
 Var roudou Jesus da vale
 Ra vo en hon ty mab Doue
 Ar Mestr karet hag ar Roue

XII

Pa zeuio Doue d'hor gervel
 Ha pa vezimp var-nez mervel
 Asten da zorn madelezus
 D'hor bleina oll d'ha dy Jesus